

KANTIK

Sant Bonifas ha Sant Thyrs.

Pegen kaer, pegen din euz eur c'hristen,
Eur maro kris, 'vit ar Relijion !
Setu aman relegou ar verzerien
Sant Bonifas, ha sant Thyrs he vignon.
Er gher a Drev, dre urs an' Impalaer,
Oant gourdrouset da renons d'an' Ilis ;
Kentoc'h mervel, a respontchont-hi ker kaer
Kentoc'h mervel eghet nac'h hon feiz !
C'houi konsortet sant Victor ha sant Mauris,
En hon amzer ken trist hag oc'h hini,
Obtenit deomp, obtenit d'ann Arvoris,
D'ar guir Doue renta oll testeni.
Dre ho maro, c'heus diskuezet ho kreden,
D'ho relegou ra honor an' Ilis.
Evel doc'hu ra varvimp guir gristenien,
Kentoc'h mervel eghet nac'h hon feiz

Henor deoc'hu, sant Thyrs ha sant Bonifas,
Henor deoc'hu, merzèrien kalonek !
Dre ho peden, obtenit deomp-n'hi ar c'hras
Ha d'hor bro ker eur zicour talvoudec.
'Torrit chaden ar Prisonnier glorius
Pi nao Roue, Tad santel an' Ilis !
Ha n'hi gano, ar c'han-ma victorius :
Kentoc'h mervel eghet nac'h hon feiz.

Ma teu biken an' amzer da anduri
Evit ar feiz ar c'hruella maro ;
Grit deomp trec'hi, e kreis ar verzerinti,
An tourmanchou memes ar re c'haro.
Hon daoulagad ho para var ho squeriuou,
N'hi a zalc'ho da lezen an' Ilis ;
Ha n'hi gano c'hoas e kreis hor poaniou :
Kentoc'h mervel eghet nac'h hon feiz.

IMPRIMATUR.

Corisop., 17 Décembre 1872.

L. DE LÉSÉLEUC,

VIC. GÉN.